

# SON ar BLEO TROUC'HET

(Evid ar Merc'hed)

Son ha ton, nevez  Chanté par M. Coat Claude

*sur les places et marchés*

I

Eur vro'z eus deuet eur c'hiz nevez  
Digaset eus Paris pe Londrez  
Hag e Kastell, breman ar merc'hed  
Zo 'vel pa vijent holl dirollet.

II

Gwelet e vezont a pourmen kear  
Soun a fennou, o friou en ear  
O vousec'hoarzin hag o lavaret  
— « Sellit, sellit ouz va bleo trouc'het ! »

III

Betek war ar meazion, ar merc'hed  
Da drouc'ha o bleo a zo staget  
Gwelet e vezont a vont d'ar park  
Gant o bleo trouc'hed « à la Jann Dark »

IV

— « Breman ni gavo gant hor bleo berr.  
Tud a zoaré d'non digas d'ar ger  
Ha pa'z aimp ganto d'ar pardonieu,  
E vézump karget a vadigou... »

V

Goulskoudé, merc'hed, sonjit ervad,  
Ne vezo ket deoc'h holl eun dra vad  
Mar ho peus laou kuzet en ho penn  
War ho kouzoug e teuint da bourmen !

VI

Gant kalz ac'hanoc'h eman ar c'hiz  
Goalc'hi ho kouzoug eur wec'h er biz  
Allaz ! breman gant ho bleo trouc'het  
Bemdez e ranko beza goalc'het !

VII

Ha, pa'z ay kuit ar c'hiz divalo,  
M'arvoad c'houi vezo nec'het maro :  
D'ober bleo nevez vo red d'eoc'h kaout  
P'eb a deir dousenn a lostou-saout !

VIII

Selaouit 'ta, ganig ha Janed,  
Mar ho peus c'hoant plijout d'ar gwazed  
Ha c'hoant da gaout eul labourer mad  
Lezid ho pléo buan da hirraat ?

FRANCIS MOAL

(Reproduction interdite)

Imp. Louis Beaulé Morlaix

*Air note au verso par Francis Moal en Coat Claude*

sol do do do, sol do re mi re do  
fa fa sol mi do re re re

sol do do do, sol do re mi re do  
fa fa fa sol mi do re re re

sol sol mi do, fa sol fa mi re  
do mi re do sol, do re mi re do

ritar.

do re la, la sol la si do do

do re mi, mi mi fa mi re

do re la, la sol la si do do

do re mi sol fa mi re do